

Boudig (?)

Bet embannet tro-dro 1920

Son eun den yaouank a zo bet traiset gand e vrasa mignon

War don : *Me 'm-eus choazet eur vestrez.*

Ha bremañ pa m'on diechu gand nebeud a studi
Me 'ya da zevel eur zon hervez ma fantazi ;
Mez kent mond pelloh a-raog, me ho ped, Bretoned,
Na rit ket skouarn vouzar, gand se ma zelaouet.

Me 'zo c'hoaz eun den yaouank, 'greder ket d'am homzou,
Koulskoude gand ma hompaz ouzon tenna planiou ;
Eun all 'm-eus da rei deoh, oll dud yaouank kuriuz,
Tehet pell, mar am hredet, deus daou hent dañjeruz.

Ar hentañ gantañ 'zo hent ar mabig Cupidon,

An hini¹ dre gomzou kaer 'n-eus tizet ma halon,
Rag ma 'm-eus choazet da vestrez eur plah d'am fantazi,
'Ran forz petra 'vo laret, ne garan nemeti.

Kenta 'm-eus bet an enor hag ar chañs d'he gweled,
'Oa an dri, sul a viz Eost, war dachenn ar Sklêrded ;
He daoulagad a verve, he horv 'oa moan ha koant,
Ne gredan ket 'ma he far 'barz an departamant.

Hi 'doa laret din traou kaer, ya, eno da gomañs,
'Vid ma lakaad da veva, ya, war an esperañs :
« Arsa, eta, den yaouank, poent eo dim kimiada,
Rag tostaad a ra d'an noz,hag an heol 'izella.

Kenavo 'ta, ma mestrez, ha dalhet d'ho komzou ;
Doue, ar Mestr, mar plij gantañ, 'vim dimezet on-daou,
Mez 'vid beza dispartiet, kreid mad ne vim ket ;
Piou 'virfe 'vim eureujet 'med teodou milliget.

'Rabad eo dim kaoud anao 'barz on tud na 'barz den,
Med on lezet en or c'hoant pa ne houlennom ken ;
Ma teufem da veva a-drugarez Doue,
Ni 'zo sur da voud euruz 'hed an eternite. »

N'eus netra bet joausoh evid an nevez-amzer
Pa glever al lapoused peb leh dre ar harter
Pa glever deuz ar mintin darn 'neze o ragachad
Hag an darn all o kana, darn all o c'hwitellad.

Setu aze eur skwer gaer, tud yaouank, 'vidom oll,
An hini 'welom bemdez, 'r hentañ ma par an heol,
An deiz all, dreist ar re all, leun a blijadurez,
Me 'yeas d'an abardaez-noz beteg ti ma mestrez.

Ne oan ket pell deuz he zi, pa harzas ma fasaou²
Me a wele daou eostik war ar memez bodou ;
Plijadur 'm-oa d'o gweled, muioh c'hoaz d'o hleved :
Peseurt laouenedigez ! pried ha priedezed !

Mez eur pennadig goude ma welis ma mestrez
Gand eur galon hlaharet, leun a dristidigez :
« Yehed mad deoh, ma mestrez, ha joa pa ho kwelan,
Me 'gav din 'peus poan spered, pe 'hend-all oh bet klañv, »

« N'on ket bet klañv, den youank, poan spered n'am-beus-me,
Nemed red eo din senti ouz gourhemennou Doue ;
Ma zad en-deus laret din, deh, 'raog mond da gousked,
Penaoz eo red ho lezel : henoz 'vin goulennet. »

¹ An hini : Pehini, er skrid orin.

² fasaou : ma hamedou.

« Souezet on, ma mestrez, pa zoñjan er pardon,
An deiz-se ne greden ket e chenje ho kalon.»
Na laret ket, den yaouank, n'on cheñch-dicheñch atao ;
Mar pije gwelloc'h, 'vijeh ket deut en-dro.

Ha bremañ me 'm-eus karet eun den hervez ma hoant ;
Ouspenn ma'z eo eun den brao, ne vank ket dezañ arhant."
« Me ho kleo mad, plah yaouank, red eo din ho tilezel ;
Me 'garfe beza en douar, er bed ne vin ket pell.

Kenavo deoh a laran, kenavo gand glahar ;
Setu-me 'vel eun tad-moualh pa vez o klask e bar ;
Mez dre e vouez truezuz hag e gomzou tener
Eñ 'zo sur deuz unan all, hag he have emberr.

N'eus ket mui a blijadur e-mesk ar yaouankiz :
An tadou hag ar mammou hen divenn e pep kiz ;
Int 'dlefe dond da zoñjal emaint bet 'vedom-ni,
Mez an oad a vir oute, ha n'hellont ket boud mui.

M'em-boa eur galon ken gê hag ar roz da viz Mae,
Me 'gane, 'vel an eostik, er festou, noz ha de',
Mez setu on traiset gand Bacchus, ar Judas,
Kement en-deus ma anavezet n'e' ket 'vid lared pas.

Mez joa dim war an douar, plijadur er bed all !
Koulz zo dim-ni beza joauz 'vid 'n em daol da vervel,
Mar faot deoh goud ha kleved piou 'n-eus greet ar zon-men³ :
Ma ano 'zo Yann Boudig, euz a barrez Kerrien.

³ men : mañ.